

## Son ar Brezel

### I

Breudeur, me ho salud gant ma brasarespect,  
Pa ret d'in an enor da zont holl d'am c'hlevet;  
An amzer a zo trist, ma c'halon zo ive,  
Hon foaniou zo kalet, plijet klevout ane.

### II

An histor zo trajic, 'vit hen larout ervat,  
Ma spered zo dinerz, met ho kalon zo mat;  
Rakse ma digouez d'in mankout ekreis c'hoari,  
Me "zo sur diouzoc'h holl da zont d'am pardonni.

### III

Gant arrach hag anken n'imp a oa pennfollet,  
D'an eur m'oa ar brezel eur wech c'hoas diskleriet,  
Kleier, leun ac'h lac'har, a oa kroget da son  
An ton ken alarmus a mobilisation.

### IV

Trist ha kalet a oa lavarout kenavo,  
Met tristoc'h ~~ekreis~~ oa kals c'hoas mont dirag ar maro.  
Kuitaat ar gaer a bouez war ar galon nerzus,  
Mes kuitaat ar vuhez zo dei eun dra euzus.

### V

Lavarout ho peuz dê: "Kenavo, chans, yec'hed.  
Ha gwellan grass Doue war o kiz da zonet."  
Ho c'halon d'oa fizianz o klevout ho menat.  
An tennou hag an tan dioutan reje goap.

### VI

Kreiz ar walen a vez eul loden espernet,  
En ho mesk e kaver tud planetenn gallet,  
Trist eo koll ar vuhez pa ya ar goad da goll,  
Rak ar gwad zo skuillet a zo dismantret holl.

### VII

Ar Frans 'neuz imbannet pegen izell e oa  
An enor memp kollet 'noket savet 'neur bleaz  
Mes, mar fell d'imp breman sonjal en hon foaniou,  
Ni-zur-mat, hatkavo hon flass mesk ar broiou.

### VIII

Doue, tad ternel, mestr an env, an douar,  
Sellet ouz ar galon a zo enni glac'har,  
Plijet d'ac'h, me ho ped, dre o kwir providans,  
Bei d'ar brisonerien nerz, kalon, ha fizianz.

### IX

Sonjet ta, mignoned, kavant hizr an amzer  
E sonj an tiegez a zo manet e ger.  
Gwellout rant bugale, n'int ket siouaz e re  
Kri kaer eo ar galon na gemer ket truez!

### X

Al lapouz a return pa deu nevez amzer,  
Hennez a zo diaskell mab Adam, ar pec'her,  
Pa deu ar bleun er c'noat hag an heol lugernus,  
Buhez ar prisonier zo bopred hirvoudus.

### XI

Na n'eus nemet eun dra 'chellfe o c'honsoli  
Kelou mat ous ar ger ha gantan eur c'holi,  
Bezomp holl karantez ha mat en o c'henver,  
Ha pedomp evite ma returnfont d ar ger.

## XII

Respect am eus d'ac'h hoñl, metpriset am c'hlevet,  
 Pez 'zo deuet em spered me vo ret d'in laret  
 Me ho suppli, merc'het, na vet ket re estranj;  
 Bezet sonj ous ar re 'neus beñ ho allians

## XIII

Pelloc'h a yelo c'hoas ma résolution,  
 Daoust ha na blijo ket d'an dud holl maraison,  
 Eur galon divroet, goude-se ankouaet,  
 A zo prest da vervel, Malloz d'it gwall bried.

## XIV

Pa 'man er bed kouezet 'neur seurt tristidigez,  
 N'eman ket d'ac'h ar c'houls d'ober hoitronez,  
 Breman he kemeret ho holl bras plijadur  
 Aus d'ho penn, ar maro a yud trist ha hudur.

## XV

Ar galon 'zo hep boued pe beus c'houi en abondans.  
 A lavar 'oc'h-hu c'houi gwall indign ouz ar Vrans,  
 Mar 'peuz klasket sevel ho yalc'h diwar ar paour,  
 Kont ho po darenti: ar paper n'eo ket sour.

## XVI

Me a get kompagnonez eve troublet mamemoar,  
 An defot dagemense a finissan an histor,  
 Me o ped o vadelez da zont da m'ho exkusi  
 Mar 'na meus ket gallet plijout da peb hini.

## XVII

Bevomp holl, ma zud vat, gant eur galon leall,  
 Ha Doue 'savo v'hoaz ar vro hanvet Bro-C'hall,  
 Pa vo fin d'ar walenn, ma c'halon vo laouen,  
 Ha joausted a vo eun c'hentan kanaouen.

Yves le Goff

à Kergoguen, Plougonver (C du N)

(Tous droits réservés).

Verso: en blanc.